

KLEMMOU

EUR PLAC'H MANKET



Var eun ton trist.

Selaonit breman va mourz, o va c'hamaradezet,
 Choui pere em yaouarkis, a meus bet kals karet,
 Eus a Doullie al Ludu, me ra deoc'h ma c'hlemnou,
 Deut holl assemblez gan-in, da veska ho daë'ou.

Me a me: z kolet breman va reputation,
 Va c'halon a zo karget ha zezolation,
 Dre ma meus kredet, sioas, va facz k'maradou,
 E meus kolet ar c'haëra demeus va bokejou.

Beteg breman me c'halle laret a vones huel,
 E oan kaera fumelen e oa e Breiz-Izel,
 A breman me zo udur etouez an holl verc'het,
 Pa eo va c'haera bouket sioas gan-in kolet.

Hennez oa kaera tenzor e oa bars er bed-man,
 Ne kavin ket enep leac'h, da brena seurt d'ez-han,
 Dre veza deut da gredi kamaradet treitour,
 E meus lezet va boket da vonet gant an dour.

Pa deuan d'examina er voul rond deus ar bed,
 Sioas me wel varnezhi breman kals a verc'ed
 Pere zo kollet gante kouls a me ho rozen,
 O veza dent da fiout en komzou treitourien.

Va holl gerent zo sioas gan-in dizonorit,
Va chans a zo dinatur, va flaneden kallet
Va c'halon zo en hirvoud, kouls en nez vel en de,
Me a c'houlén ar maro, vit disken bars em be.

Goude va fragilite, me zo holl ankeniet.
E kompren barz er stad-trist, e pehini on rentet,
Beteg breman me meus bet douget kokardeno,
Breman e m'eus eur bzae'h, eur vaz da vont en dro.

Beteg an oad ugent vloaz, me a meus bet bevet
Ebars e doujans Doue, evel ma vez gleet,
Neuze me a oa karet gant an holl em c'hanton,
Neuze, kamaradezet, oa laouen va c'halon.

Goude me meus bet heuliet, kouls en noz vel en de,
Ar gwal kompagnunez, a zo bars em c'hontre,
Dre ze me zo mepriset, ebars en Breiz-Izel.
Ma evrustet er bel-mañ, zo eet gant an avel.

Ne meus ket heuliet sioas, a is tad na mam,
Dre-se ne meus ket gallet beva ive divlam,
Greet a meus skornañ vouzard pa gleven anezha.
Koulskoude deus bet 'aret ar wirionez dia-ma.

Lavaret zo bet din-me gant he sur aliez,
E heul gwal kompagnunez, mije tristidigez.
Mes dre ma oan c'hoas yaouank, veprisen ho c'homzou,
A ze ra din-me breman skuil eur mor a zaélou.

Ma mije bet o c'hredet, heuliet ho gourc'hemen,
Va buez, kamaradezet, e vije bet laouen,
Mes pa ne meus ket sentet breman demeus ar stur,
Allas vit deus ar garek, e rakin ober zur.

Noz a de he m'hon en eur stad trist meurbet,
Awichou me eun tam da zebri, gweach all ne me ket,
Goude ma ve erc'h ha scorn, ha ienn bras an avel,
Keunneud ne mo ket d'ober tan da doma va bugel

C'houi, va c'hamaradezet, goude va holl anken,
Deñio c'hoas d'am goapaad, gant eur galon laoueu,
Mes mar kemerit an hent, en pehini zo danjer,
C'houi a pezo evel d'hon da zougen bec'h pouner.

Allas ! kamaradezet, daou hent zo er bed-man,
An hini gemer an hent mad, deus da zougen bec'h skan.
N'hep gemer an hini fall, bale war va roujou.
Deus eun pouner da zougen ha kals a dourmanchou.

Vit war va chouck breman, a zo eur bec'h pouner,
Hag a meus deus e zougen, kals a boan a miser.
Dalc'het vezin d'er dougen beteg fin ma deiou.
Adieu 'ta d'am yaouankis, ha d'am plijaduriou.

CHOM EN BREIZ-IZEL

62

WAR DON ; *Er Finister ez on bet ganet...*

Kinniguët d'ar mærc'hed yaouank a
c'hoantañ monn da Bariz

Plac'hik yaouank, perag 'ta tec'hel
Pell dimeuz da vam ha da dad ?
Perag kwitad da vro Breiz-Izel,
Elec'h out evuruz ha mad ?...

Ankoua ar c'heriou,

Gand o falz-madou ;

Enne 'lec'h madou e kavfez trubuilhou.

O chom en bro da gavel !

Chom, chom en Breiz Izel ! ! { *Diou weeh.*

Ar c'heriou a zo leun a anken
 D'an dud zo ennê divroet ;
 Ennê ar c'halonou a zo yen,
 Karante wirion nan euz ket !

Nemed gwarizi,
 Droug ha kasoni,
 An holl oc'h en em daga, en em dibri...

O chom en bro da gavel ! (*Diou wech.*
 Chom, chom en Breiz-Izel !! (

Pell diouz da vro kollfez da c'hlanded,
 Koll rafes ive da furnez,
 Da yec'hed, da nerz ha da c'hened,
 Ha da vrud vad a Vreizadeg ;
 Goude en dizro,
 A vo c'hoaz daero :

Ar farnez kollet na deu morse en dro !

O chom en bro da gavel ! (*Diou wech.*
 Chom, chom en Breiz-Izel !! (

Da dad, da vam baour zo o ouela,
 En o daoulagad daerou kri... !
 Piou a roio d'ê eun tam bara ?
 Ha piou a harpo o c'hozni ?

'Glevez ket o mouez,
 A lar hep paouez
 D'id gant karante ha gant kalz a furnez :

O chom en bro da gavel ! (*Diou wech.*
 Chom, chom en Breiz-Izel !! (

Petra eta c'hoarve d'ez kalon,
 Ma kwitaez eur vro ken koant ?
 Petra c'hoantaez, lavar hep aon,
 Lavar breman hep nec'hamant ?
 Evidout, me gred,
 Breiz a zo bepred
 Eur vro ar gwellan a ro ebarz ar bed,
 O chom en bro gavel !
 Chom, chom en Breiz-Izel !! } *Diou wech.*

An douar a roaz d'az tadou
 Eur bevanz frank mad ha nerzuz,
 A roio d'id, enpad da zeiou,
 Magadurez krenv ha yac'huz ;
 Bez eta dinec'h,
 Gant poan da ziouvrec'h
 E vrevi en Breiz gwelloc'h pell 'vit neb-lec'h !
 O chom en bro da gavel !
 Chom, chom en Breiz-Izel !! } *Diou wech.*

Na gwita ket da douriou uhel
 Kizellet ha dantelezet,
 En pere ar c'hleir en avel
 A zon goueliou hon zent karet,
 A lid pardonjou,
 A gân eurejou,
 Hag a lavar d'id dre hekleo o moueziou :

O chom en bro da gavel !
 Chom, chom en Breiz-Izell !! } *Diou wech.*

Na gwita ket bro da Gendadou,
 Bro ar gizioù koz ha fur,
 Bro ar chapelioù, ar c'halvarioù,
 Bro peb frankiz leun ha distur ;
 Bro ar zonioù kaer,
 Ar gwerzioù tener,
 A ziston bemnoz a-dreuz d'on farkeier.. ;

O chom en bro da gavel ! (*Diou wech.*
 Chom, chom en Breiz-Izel !! (

Chom da veva en ez traouiennik,
 Elec'h m'eo zavet da di plouz ;
 Elec'h ma c'hoariez, bugalik,
 Seder ha pell d'ameuz peb trouz. . .
 Kar da veneou,
 Da lann, da goajou,
 Gante e klewi dre vouez an avelioù :

O chom en bro da gavel ! (*Diou wech.*
 Chom, chom en Breiz-Izel !! (

Chom da veva en harz an iliz,
 Elec'h ma'z out bet badezet,
 'Kichen ar vered 'lec'h ma tiskwiz
 Da gerent koz pezl'zo marvet,
 Ha neuze ive
 E c'halli goude
 Diskwiza gante, 'barz an hevelep be :

O chom en bro da gavel ! (*Diou wech.*
 Chom, chom en Breiz-Izel !! (

Peb tra en Breiz a bed ac'hanoud
 Da chom en o c'hichen, 'n o zouez ;
 Chilaou anê, holl o deuz galloud
 War da galon a Vreizadez...

O kaeran peden
 A laront dan den,

A c'hoanta kwitâd e vam-vro da viken :

O chom en bro da gavel !
 Chom, chom en Breiz-Izel !! { *diou wech*

Kas pell diouzig ar sonj divalo
 An euz trubuilleit da spered,
 Chom breman da veva en ez pro,
 Enni'z po levezeg bepred !

Lavar eveldon,
 A-greiz da galon.

Ma klevo Breiziz hon c'hân kaer a gwirion :

Chomomp en bro hon gavel !
Chomomp en Breiz-Izel !! { *diou wech*

AR YEODET

Distro ar Martolod

63

WAR DON : *Ar Bempouezen*

Arriz ez eo 'velkent an devez
 Oa pell 'zo ganin gortozet ;
 Hirvoudi am euz groet aliez,
 Bremau ma chaden zo torrêd...
 O devez karet.
 Devez binniget !
 Zav warnon da heol madelezuz,
 Ma tommo c'hoaz ma izili !
 O heol, skuilh da sklerijen lintruz,
 Ha kemer lod 'barz ma dudi !

Meur a wech am euz bet poan-spered,
 Skuilhet am euz ive daerou...
 Hirie ez on evuruz meurbed,
 Achu ez eo d'am zrubuilhou.
 Devez binniget,
 Ha ken gortozet,
 Tridal ra ma c'halon en em c'hreiz,
 Seder ez on v'el e'n eostik ;
 Souden e welin c'hoaz ma bro Breiz,
 Ma farrouz, ma zud, ma « dous-k » !

Eapad ma zroriou war ar môr braz,
 Meuz gwelet kalz a vroïou koant,
 Mes n'ameuz gwelet... O lan, biskoaz!
 Hini hag a vefe keu drant

Ha ma brot garet,
 Breiz-Izel hanvet. .

O ma Breiz, Rouanez ar broïou,
 Breiz, bro dudiuz ha dispar ;
 Eur martolod-bugel d'az aochou,
 Eus a nerz e galon da gar ! !

Hepdale 'n em gavo adarre
 Ma zreid war da zouar kaled.
 Hag eno gand an amzer neve,
 E klevin kân al lapoused ;

Pere a laro
 En-touez o zonio :

Dizro, dizro martolod yaouank :
 Deuz da weled da lojennik,
 'Lec'h ma kavi eun nor digog frank,
 Eun tad, eur vam hag eun « dousik » !

Oh ! gwelet a ran tour an iliz,
 Klevet a ran mouez ar c'hleier ;
 Gand o zon en em gavan diskwiz,
 Ma c'halon zo laouen, seder,

Rag ma'z eo ken kri
 Tec'hel, kimiadi. . .

Pegen evuruz ez eo ive.
 Goude ma ver bet ankeniet,
 Dizrei yac'h mad ha leun a vue
 D'ar vro elec'h ma ver ganet !

N'oufe den laret ar blijadur
 A zo breman 'barz ma ine ;
 C'houez ar bleun balan, lann ha gla-
 [zu]

A ra d'ic beva a neve...
 Diragon 'w lan
 Au ti a garan...

Ti plouz ma zud kod, ma mam, ma zad
 O ti b'han koant me c'havel ;
 Ac'hanout-te a garin da c'hamad,
 Eannout-te e fell d'in mervel !..

Eannout e teuin da zi-kw'za,
 Dimeuz ma zroriou hir pa pell,
 Eannout e chomo ma « deus » Anna,
 A sko breman warno eur zell ;

He daoulagad c'hlaz
 D'in-me a ouelaz...

'N em frea'z hirie, ma dousik koant,
 Setu c'hoaz da welan mignon :
 Gantan na gemer ken nec'hanant,
 Rag d'it-te ez eo e galon !

Tad ha mam gez, setu ho pugel,
 Paet gantan e c'hle d'ar vro ;
 D-zro ez eo c'hoaz da Vreiz-Izel,
 Warnan na skuilhet mai daero,
 Mes roet d'ezan

Ho pennoz gwellan ;
 Binniget breman e garante,
 Ha groet ma ve zo evuruz ;
 Annaik' vo e wreg hepdale,
 Annaik a ve d'ac'h doujuzl

AR YEODET.

